

n 3

---

ILIS MIRACULUS AN ITRON VARIA REMENGOL.

**Savet gant ar Roue Gralon,**  
**GOUDE MA VOA BEUZET KÆR-IS.**

---

En Escôpti Kerne, el lec'h emma brema môr Douarnenez, e voa guechal eur guær vras meurbet, hanvet Is.

Eur voguer ledan ac huel, gant sclujou houarn he difenne deus ar môr. Er guær-ze ne velet, e touez an dud pinvidic, nemet dizurs, goal exempl a fallagriez. Gralon, pehini a chome neuze, en Is a voa Roue Breiz-Izel. Bet e voa brezeller en e yaouanquis, a rust en andret e zujidi; mæs en e gosni, sclerijennet dre ar feiz christen, e teuas da veza douc, evel eun oan. Hirvoudi a re, alies var dizurzou Is, a var ar vuez dirollet a rene e verc'h, ar brincès Ahès, gant an noblanç yaouanq a guær, a deus ar vro hanvet, hirio, Kær-Ahès, pehini a voa dezi a leve.

En amzer-ze, e voa e Breiz-Izel, daou abostol zantel, daou vignon da Zoue, sant Caourintin, kenta Escop à Guemper, a sant Guenole (1), kenta abad a Landevennec; alies ho devoa prezeguet ar feiz er guær a Is, a gourdrouzet ar Roue Gralon, abalamour d'an droug-oberou, d'an torfejou a d'an injustiçou a ret, bemdez, e pales e verc'h yaouanq: mæs goab a ret anezo, ac ar Roue, sempleet dre an oad, nen devoa mui a c'halloud avoalc'h evit arreti dizurzou ker bras.

Doe a skuizas, er fin, o velet Is caledet en he fec'hejou, ac a roas da anaout da Æl Breiz-Izel, e vignon, Guenole, penos, eb dale pell, ar guær gaër-ze a vije beuzet gant ar môr. Kerkent, Guenole a bignas var e varc'h, ac a redas da guær Is, o sonjal c'hoaz dizarmi koler Doue. Mæs tremenet e voa an amzer a druet. P'a en em gavas an abad santel, var dro anter-noz, selujou Is a voa digor, ac ar môr a c'hroze spoutus, o tiruillal var an daf, an tier ac ar palechou. Guenole ne allas savetei nemet Gralon eb ken; guelel a rer c'hoas roudou treid e varc'h er garrek, var behini, a ba-ouë, abaded Landevennec, araug komer ho c'harg, a deu da ober ho feden a da anaont ar Roue Gralon evit fondatour ho c'houent.

Kær-Is ne m'a mui, evel Sodôm, Gômor a Babylon; ac hirio ar môr a ruill dreist he fen.

Da zao-heol, Gralon, o veza pignet, gant Guenole, var lein Mene-Hôm, a dolas, ac'hano, cur zell truezus var e lerc'h: Mæs el lec'h ma edo ar guær gaër a Is, ne velas mui nemet môr Douarnenez, ac e kouezas d'an daoulin evit trugarecat Doue ac ar Verc'hes da veza saveteet e vuez.

Pa zavas divar e zaoulin, e velas dindan an heol, o luguerni, *Ru-mengoulou*, pe *Men-ru-ar-goulou*, var pehini e vije sacrificet, tud veo, a beb mis, eur buguel bian, c'hoas eus ar vrôn. Neuze, beuzet en e zaëlou, ac e zaoulagad savet e trezeck an En, e lavaras d'e vignon santel:

---

(1) *Guen-oll-e, Oll-e-Guen* (il est tout blanc), hanvet evel-ze gant e vaim, ar santes Ven, abalamour ma voa eur buguel coant a fur. Sant Guenole, dre e vertuziou, en deus meritet an hano caër a Æl Breiz-Izel. (L'Ange de la Bretagne.)

« Var ar Men ru zont, consacret d'a eun Doue barbar, me a raï sevel »  
» eun Ilis caër d'ar Verc'hes, ac el leac'h ma skuiller ar goat da Teutatès,  
» e skuillo Mam ar guir Doue he graçou var Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'has mad de bromessa, a beleyen ar Bayanet, o veza en em revoltet, pa veljont dispen templ an Doue faos Teutatès, ar Roue christen ho zrehas e kever Argol, e pen ar Vretonet convertisset.

Goude beza gret e beden, var Mene-Hôm, ar Roue Gralon a heuillas Guenole da Abaty Landevennec, savet gantan, eun neubeut blaveziou kentoc'h. Diarauc kement-ze, en devoa, c'hoas roët e balès, e Kemper, da sant Caourintin, pèhini en devoa torret e naon dezan, a de compagnunes, gant eun tam deus e besk bian. E plaç ar palès-ze, e ma brema Ilis caër cathedral Kemper.

Gralon a dremenas e Landevennec, ar rest eus e vuez, en eur binigen galet, ac alies e ze gant e vignon ker da Remengol, da bedi evit e hobl, an *Itron Varia Remed-Oll*. Beza en devoa an eur d'he guelel brudet bras e pevar c'horn Breiz-Izel, ac o vervel etre divrec'h sant Guenole, e Landevennec, e recommande e ene da Zoue en eur lavaret gant fiçians :

« Itron Varia Remengol,  
» Mirit ouzin na zin da goll. »  
» Pedit ive, ho mab Jesus,  
» Ma vezin gantan evurus. »

Chouezec kant vloas a zo, a ba-ouë, ma e maro Gralon, ac ar Vretonet, pere zo, bepret, tud a feiz ac a galon, ho deus c'hoas sonj eus ho Roue cöz, ac eus e vignon, sant Guenole. Mæs ma c'hanavefent guelloc'h histor ho bro gaër, pa zeont da zul an Drindet, da bardon bras Remengol, a pa velont môr Douarnenez, Mene-Hôm, Landevennec, a tour huël Ilis miraculus an *Itron Varia Remed-Oll*, e lavarfent, an daëlou, en ho daoulagat, en eur vale gant respet, var douar ar Sænt ac ar Rouane :

« Bras ar burzudou a zo bet,  
» Ebars en amzer dremenet !.... »

Bras ive ar burzudou a ra c'hoas, hirio, an *Itron Varia Remengol*, en andret an oll Vretonnet, ac ispicial, en andret ar belerinet a deu bemde, d'he guelel, alies eus a bell bro, a calç anezo, diarc'hen, ac e corf ho rochedou.

Ar vinoret dilezet, an intanvezet paour, ar beorien noas, soudardet Breiz-Izel, e creis tân ar brezel, ar vartolodet var ar môr bras e furo, an oll dud affliget, a gorff, a galon ac a speret, darn en ho foaniou, darn en dangerriou, darn all en dizesper, ac oll var gouele ar maro, ho deus sonj eus ho mam douç a mad, ac alies e leveront dezi, gant carante a gant fiçians en he galloud, ac en he madelez.

« Guerc'hès sacr' a Remengol, patronez Breiz-Izel,  
» Pedit evidomp, hirio, a pa rankimp mervel;  
» Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet,  
» Ho deus ho caret, ho car, ac ho caro bepret. »



# CANTIC SPIRITUEL

EN HENOR

**D'AN ITRON VARIA REMENGOL (\*)**

**PATRONES BREIZ - IZEL ,**

**UR PLAÇ SANTEL MEURBET A SO EN ESCOPTY KERNE ,  
E PARES HANVEC , TOST D'AR FAOU .**

---

Itron Varia Remed-oll ,  
Miret ouzimp ne c'haïmp da goll .

---

Guerc'hès sacr' a Remengol , Patrones Breiz-Izel ,  
Pedit evidomp , hirio , a pa rankimp mervel !

Var an ton : *Glac'har ar Verc'hes* .

Tad , Mab , ha Speret-Santel , tri ferson an drindet ,  
Me ho ped , a vir galon , da roiñ din ar speret  
Da compozi ur c'hantic d'ar stereden vrillant  
Ar fourdelisen gaëra demeus ar firmamant .

Ho Merc'h eo , Tad Eternel , ar Verc'hes binniguet  
Pried ar Speret Santel , Rouanez an Alet ,  
Dreist an oll groaguez devot hi so bet cavet din ,  
Da veza mam da Jesus , hon Redemptor divin .

Pa zeuan da niveri , Guerc'hes sacr ha santel ,  
An enor , ar meuleudi hoc'h eus e Breiz-Izel ,

---

(1) Remengol , hanvet gouechaf , *Ru-men-goulou* , da lavaret e , *Men-ru-ar-goulou* , abalamour ma voa , eno , eur men ru , pe eun templ , consacret da c'houlou De , enoret evel eun Doue , dindan an hano à Teutatès ( Doue-Tad ) ar Roue Gralon , goude beza discaret an templ-ze a savet , en e blaç , eun ilis caër da vam ar guir Doue , a c'hanchas hano payen *Ru-men-goulou* , en hano christen a *Remengol* , da lavaret e , *Remed-oll* , d'eus a behini ar Batrones a zo hanvet *an Itron Varia Remed-oll (Notre-Dame de Tout-Remède)* abalamour dar burzudou bras a ra bemdez , eno , ar Verc'hes , a ba-ouë amzer ar Roue Gralon , betec hirio .

Eno , zo c'hoas induljançou ar re vrassa accordet gant hon tad santel ar Pab , d'an oll gristenien , a deu da Remengol , da bidi , a galon , Patrones Breiz-Izel .

Remengol a zo bet , a viscoas , ar gaëra ac ar santela Ilis a Vreiz-Izel ; hervès an dud coz , peb guir Vreton , a gle , eur veach , da viana , *beo pe raro* , ober pelerinach Remengol .

Va speret a so dister evit ho discleria,  
Neme doc'h-bu a zeufe, hirio, d'am azista.

Mæs ennoc'h leun a fianç em eus antreprenet,  
Publia ho calloud vras etouez ar Vretonet,  
Ha discleria ar graçou accordet d'ar bed oll,  
Dre c'hraç Jesus hon Autrou, en ilis Remengol.

E pep lec'h m'eo enoret Mari, hor mam santel,  
Alies ve silaouet nep so dezi fidel,  
Mes beza e deus eur plaç, bars en pini bemdes,  
E scuill var ar Vretonet tensor he madeles.

Er plaç ze, e Breiz-Izel, meurbet darempredet,  
En escopti a Guerne, er bares a Hanvec.  
Eus un ilis consacret da c'hloar a dâ enor,  
Rouanez an oll Alet, guir vam hon Redemptor.

Guir dud devot d'ar Verc'hes, m'ho ped, diredit oll,  
Deut gant laouenidiguez da ilis Remengol,  
Evit pidi mam Doue da roi deoc'h ar yec'het,  
Ha da zivoal hoc'h ene dious laç an drouc-speret.

M'ar d'ê poaniet oc'h ene gant gouliou ar pec'het,  
Deut d'ar sourcen a vuez, hac ho pezo remed,  
Goulennet oc'h mam Jesus graçou celestiel,  
Ma c'hellot chench a vuez, beza dezi fidel.

Mar dé ho corf forbuet gant an infirmite  
Deut da ilis Remengol gant eur guir garante,  
Ur plaç leun a viraclou dre c'hraç ar Verc'hes sacr,  
Pini en oc'h oll boaniou, ho soulajo, timat.

A bêvar c'horn Breiz-Izel, e teu pelerinet,  
Da bidi Mam hor Salver gant ur galon barfet,  
Eus a escopti Leon, Treguer, Guened, Kerne,  
E teu an oll dud devot da veuli Mam Doue.

Dre'r brut eus ar miraclou a ra e Remengol,  
Dre graç Jesus hon Autrou, he deus ur gallout oll,  
Mar teu ar belerinet bemdes e pad ar bloas,  
D'ober an dro d'he ilis var ben ho daou lin noas.

Un nombr bras a viraclou a ra ar Verc'hes sacr,  
Ebars ilis Remengol dre c'hraç Jesus he Map,  
Dre he zicour galloudus em eus antreprenet;  
Discleria lot anezo etouez ar Vretonet.

Ar Verc'hes a Remengol , er bares a Hanvec ,  
E devez grêt a nevez ur miracl caër meurbet,  
An oll a so estonet oc'h e consideri ,  
N'en deus netra impossubl, dec'hu, Guerc'hes Vari.

A dost dezi eur buguel c'hoas en un oat dister,  
Pa voa ar velin o vala , a goezas, er rivier,  
Gant an dour e voa ruillet , ma c'has e toul ar bal ,  
Ma songer e voa flastret, allas, gant an dour mal !

E dud gant cals nec'hamant ha melconiet oll ,  
Er goestlas, a votez huel, d'a Verc'hes Remengol ;  
Mari leun a garantez, dre he dorn binniguet ,  
A ziuellas e vuez , er meas e oue tennet.

Evit rei guir desteni deus ar miracl caër-ze ,  
Ar buguel da Remengol a voa casset neuze ,  
Laquet er procession, gantan, ur c'houlouen,  
Evit publiâ galloud ar Verc'hes souveren.

A dost d'ar C'hastel nevez hervez ma eo prouvet ,  
He deus grêt guir Vam Doue ur tuiracl caër meurbet ,  
Dre an tan un tieguez a c'he da berissa ,  
P'o deus pedet ar Verc'hes da zont d'ho azista

An ozac'h guir servicher d'ar Verc'hes binniguet ,  
En em strinquas d'an daoulin de fidi gant respect ,  
Mari leun a garantez a zigaças glao bras ,  
Ac hep ober droug da zen, an tan goal a vougas.

Chom a ran c'hoas sebezet , Guerc'hes mam a drue ,  
O compren ho carantez evit ho pugale ,  
En disquezet oc'heus bet d'eur c'hrouadur daou vloa ,  
Oc'h ober, en e andret , eur miracl ar c'haëra.

Dre eun tourmant ar brassa, eur c'hoz ty o coueza,  
Ur c'hrouadur o tremen en em gav dindanna,  
Ar vein vras en dro dezan, ma songer voa lazet ,  
C'hui hepquen en zicouras, Rouanez an Ælet.

E dud a lavare dec'h Guerc'hes a remed oll ,  
Sicouret hor c'hrouadur, pe e c'haio da goll ,  
Ar vein vras zo remuet, ha dre graç ar Verc'hes ,  
Ar buguelic a c'hoarze dindan, leun a vuez.

Mari hor mam souveren var vôr a var zouar,  
A den e servicherien dious anquen ha glac'har,

Nombr bras a vartolodet he devez preservet,  
Prestic da goll o buez, p'ho deus hi he fedet.

Nombr bras a vatimanchou he devez preservet,  
Hac an dud hac ar madou dre he graç binniguet,  
Ha bagou ha goberi e creis an tourmant bras,  
Pa bedent hor Mam Mari a obtene ho graç.

C'hoas ur c'hrouadur yaouanq a escōpti Leon,  
A voa couezet er rivier, Doue, pebez eston !  
Clasquet gant cals a glac'har, a pa ho deus pedet  
Ar Verc'hes a Remengol, en instant eo cavet.

Pa gavchont ho c'hrouadur, hac en prest da vervel,  
Ec'h implorjont, a nevez, Mari hor Mam santel,  
Da rei dezan ar vuez dre he graç binniguet,  
Dirac ar gompagnunez, ho feden zo clevet.

Un den a c'houlet Leon, a gollas ar c'herzet,  
So bet eis mis o vale var bouez diou vas-loaec,  
Grêt pris gant ar medecin evit troc'ha e c'har,  
He zroc'ha e rez e c'hlin, Doue, pebez glach'ar !

Un nosvez en e vele e teuas chonch deza  
E voa bet e Remengol gueichal o pardonna,  
Ac e sant en e galon eur garante ardent  
Hac ur guir devotion d'ar Verc'hes oll buissant.

Guir vam Jesus hon Antron, eme an affliget,  
Va sicouret em poaniou, Rouanez an Alet,  
Ha me roi e donæson ar c'haçra zo em zi  
Da gass da zeiz ho pardon evit hoc'h enori.

Mari leun a garantez a bedas e mab quer  
Da exauci ar beden a re he servicher :  
Receo a ras ar c'herzet dre graç guir *remed-oll*,  
A bet eo oc'h e meuli en ilis Remengol.

Tregont den en eur vaguic a barres Plougastel,  
A gonfontas e rad Brest, gant eur barrat avel,  
Oll e pedjont a galon patrones Remengol,  
Eur batimant a deuas, savetêt int bet oll.

Er guer gaër a Vontroulez e crogas an tan goal,  
Ar flamou tan tro var dro a velet o nijal,  
Eur barner yaouanq ractal, d'ar Verc'hes a bromet  
Mont da ilis Remengol, ac an tan zo mouguet.

Evit gounit ar victôr, soudardet Breiz-Izel,  
A bed Mari, gant fizianç, e creis tan ar Brezel;  
Ac ar victôr-gounezet, ezeont a vandennou,  
Da Remengol diarc'hen, e corf o rochedou.

Martolodet an Arvor, ruillet a diruillet,  
Var ar môr braz e furol, prest da veza collet,  
Eb ëor, eb star, eb sicour, oll e renkont mervel,  
Pa deu d'ho savetei, patrones Breiz-Izel!

Ne ouffe quet niverri na dont da henvel oll,  
Ar miracloù infinit a ra guir *remed-oll*,  
Evit nep zo guir gristen a leun a galon vad,  
Hi zo guir advocades dirac Jesus he mab.

Ken a gorf ken a ene kement zo affliget,  
Deut da ilis Remengol gant ur galon barfet,  
Pedit eno, gant fianç hor mam santel Mari,  
Ha renoncet d'ar pec'het evit plijout dezi.

Sant Thomas ha sant Bernard, tud guiziec ha santel,  
A da Vari, mam Jesus, daou servicher fidel,  
Hon assur, a bers Doue, biken, ne zai da gol,  
An nep a gar ar Verc'hes, patrones Remengol!

Demp, eta, da enori, brema, da Remengol  
Relegou sacr' ar Verc'hes, an daouzec Abostol  
A Relegou sant Joseph a guir groas hor Salver,  
Maro, 'vit al liberte, var lein mene Calver.

Relegou sant Guenole, mignon bras da Zoue.  
Relegon sant Caourintin, kenta escop kerne,  
A calçs a Relegou all, gant ar Pab digasset,  
E presant da Remengol, evit ar Vretonnet.

Couraich, couraich, Bretonnet, a gant fiçians deut oll  
Da velet ho Patronez en ilis Remengol,  
En em roet, a vremâ, da zervicha Doue,  
Ha da bidi ar Verc'hes ar rest eus ho pue.

Kement ez eo enoret ha caret gant Doue,  
Ma permet ganti ober herves e bolonte;  
An niver bras a c'hraçou a scuill demp var ar bet,  
A dremen oll dre zaouarn ar Verc'hes binniguet.

Ar bemzec eus a vis Eost, an devez ma pignas  
En Evou gant an Alet en solennite vras,

E teu an oll dud devot gant guir devotion  
D'a ilis caër Remengol da c'hounit ar pardon.

Un Doue oll galloudec a bermet dre e c'hraç  
Ma ze da Sul an Drindet ema ar pardon bras,  
Ar bobl eus a Vreiz-Izel, a veler en deiz-se,  
O tonet da Remengol da veuli mam Doue.

En deiz-se e c'houneser Induljançou plenier  
Ebars ilis Remengol e ty mam hor Salver,  
En eur ober gant glac'har eur guir confession,  
Hac o receo hon Zalver dre ar gommunion.

D'an eizvet a vengolo, gouel he Nativite,  
Ez eus ar memes pardon en ilis santel ze,  
A da peb gouel ar Verc'hes a zo e pad ar bloa  
E teu an oll dud devot de bisita gant joa.

Er solennite santel eus a Sul an Drindet,  
Kement a ya d'ar pardon a zo oll ravisset  
E consideri Jesus ebars er Sacramant  
O c'hortos hor c'halonou gant carantez ardant.

Deut oll eta, christenien, deut oll a vandennnou  
Da Remengol da bidi mam Jesus hon Antron,  
Assuret oc'h da veza gant Doue pardonnet,  
Mar bec'h guir servicherien d'ar Verc'hes binniguet.

Renoncet d'ho pec'hejou, hac en em arollet,  
Ebars er Breuriezou a zo instituet  
Da enori ar Verc'hes, evel ar Rosera,  
A rent d'hor mam souveren un enor ar c'haëra.

Ne vanquet quiet da laret bemdez eur chapelet,  
Lot demeus he c'hurunen, un dizenez hanvet :  
Nep a zui d'he recita gant carantez barfet  
A vezo guir servicher d'ar Verc'hes binniguet.

Tud leal a Vreiz-Izel, oll vignonet va bro,  
C'hui, evit pere calir ar vue zo c'houero,  
Joa deoc'h var an douar, ha graç digant Doue  
Da vont c'hoas da Remengol, ar sourcen a vue.

Pedit en ho c'hlenvejou, pedit en ho c'hlac'har,  
Ha pedit, en oll boaniou, hon deus var an douar  
Brassa santès zo er bed, Guerc'hes sacr' Remengol,  
M'ar bezit fidel dezi, ne deot biken da goll.



Guerc'hes gloriüs Vari, pedet, me ho suppli,  
Evit an oll dud devot a visitaï ho ty,  
Chasset an drouc sperejou demeus hor c'halonou,  
Ha presantet da Zoue bemdez hor pedennou.

Guerc'hes sacr' a Remengol, patronéz Breiz-Izel !  
Pedit evidomp, hirio, ha pa rankimp mervel ;  
Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet !  
Ho deus ho caret, ho car, hac ho caro bepret.

Itron Varia Remengol, mam santel da Zoue,  
Pa vimp en heur hor maro, recevet hon ene,  
Ha dre ho torn binniguet cassi-hi da repos,  
Ha da veuli an Drindet e gloar ar Barados.

---

---

## **Peden ar Roue Gralon ,**

**D'an Itron Varia Remengol.**

---

Itron Varia Remengol,  
Mirit ouzimp na zainp da goll ;  
Pedit ive, ho mab Jesus,  
Ma vezimp gantan evurus.

Itron Varia Remengol,  
C'hui eo Rouanez ar bed oll,  
Bezit hor' mam, hor Batrones,  
A ni ho meulo da james.

---

## **P E D E N**

**D'an Itron Varia Remengol,**

**Evit beza preservet eus ar c'hlevejou, hac ispecial  
eus ar c'holera-morbus.**

---

*( Ar beden ma lavaret a galon e deus preservet eun niver bras a  
dud, ha saveleel calc a re all, skoel gant ar c'holera, e kær Mon-  
troulez, er bloavez 1854. )*

---

Itron Varia Remengol, patronès Breiz-Izel, mam an oll dud affliget, a  
speret, a gorf hac a galon, c'hui a souten courach ar soudardet, e creis

tân ar brezel, c'hui a asten ho torn a drue dar vartolodet, prest da gonfonti er môr bras e furol, c'hui a zisken, aliès, e c'hars guele ar c'hnavour paour ho c'har, evit rei dean ar yec'het, hac hanvet oc'h, e guirione, *Remed ar bed oll*. Pellait, eta, diouzin, Guerc'hes sacr, ar vocen gant an oll c'hlenvejou danjerus, va diouallit eus ar maro subit, hac evit renta testeni d'ho madeles, ezin, da Remengol, d'ho meuli ha d'ho trugarecaat, en hoc'h Ilis santel. Eno, n'ho c'heus biscoas, refuset nicun eus ho pugale; bezit trugarezus em andret. Gouscoude, ra vezo gret bolonte Doue, ha pa zono va heur diveza, Itron Varia Remengol, ho pet truez ouzin, grit din mervel, en ho carante, evel ar sânt galloudus, pere a beder en ho ty santel.

Evel ze bezet grêt.

Itron Varia Remengol,  
C'hui a zo remed ar bed oll,  
Pellait diouzomp an teir goalen,  
Brezel, kernès hac ar vocen !....

Ilis Remengol a zo het, abaoue amzer ar Roue Gralon, hanvet Ilis *Remed-oll*, an *Ilis miraculus*, abalamour d'ar miraclou bras a ra, eno, ar Verc'hes Vari.

Dre he galloud ar c'hlanvour paour a bare,  
Ar mud a goms hac an den cam a vale !

Hanvet eo, ive, *ar sourcen a vue, ar feunteun a c'hraçou*, abalamour d'ar graçou a ro Doue, en ilis ze d'an oll gristenien.

N'ac a bec'her eus Doue dispartiet,  
E Remengol, a zo bet difaziet !!!....

Ilis sacr' an Itron Varia Remengol, a zo c'hoas hanvet, *Ilis ar Vretonet*, *Ilis ar sânt hac ar Rouanet*, abalamour, goude ma voa confontet Kær-Is, ar Roue Gralon a reas sevel Ilis Remengol, en honor d'ar Verc'hes, evit trugarecaat Doue da veza saveteet dezan he vue; mont a re, aliès d'he bizita, e compagnunès sant Caourintin, kenta eskop Kemper, s. Guenole, s. Guen-Æl, ha calç a sânt all, pere a veve, neuze, e couent Landevenec, hac a brezegue ar feiz, dre ar vro.

Abaoue, an amzer-ze, Ilis Remengol a zo bet darempredet gant ar bobl a Vreiz-Izel, carguet a c'hraçou hac a induljançou, ar re vrassa, roet gant hon tad santel ar Pap, hac an eskibien.

Er bloas ma, mil eis cant pemp hac anter cant, hon tad santel ar Pap, Pii nao, en deus roet da ilis Remengol, eun tam eus a vir groas hor Salver Jesus-Christ, hac eun tam eus he gurunen spern; ar memeus Pap, en eus, c'hoas, laket digas, eus a Rôm, da Remengol, eun tam eus a voal ar Verc'hes, hac eus ar bez en pehini e voa bet sebeliet, darn eus a relegou sant Joseph, sant Joac'him, sant Ian Badezour, sant Zac'harî santes Anna, santes Elisabeth, an daouzec abostol, ar pevar avieler, an doctoret bras eus an ilis, ha dre eur garante ar vrassa evit Remengol, en deus c'hoas, roet dan temp santel ze, corf san Silven ha relegou *tri c'hant pemp ha tri ugent sant, evit peb devez eus ar bloas*.

Arc'heskop Paris en deus roet, ive, da ilis Remengol, darn eus a relegou sant Louis, roue Franç, santes Genovefa, patronès Paris, ha calç a re all.

Ar c'hardinalet , arc'heskop Tour , arc'heskop Bourdel , arc'heskop Lyon , arc'heskop Rouan , eskop Strasbourg , eskop Chartr' , eskop Roason , eskop Sant Brice , eskop an Naonet , an aoutrou Joseph-Mari Graveran , eskop Kerne ha Leon , maro e Kemper , evel eur sant , eskibien all a Vreiz-izel , a Franç hac eus a vroïou all , ho deus roet da ilis Remengol , evel presanchou , ar c'haera , relegou eun niver bras a sænt , pere , da bep pardon , a ve douguet e procession , gant ar belerinet .

Kement sant a ouffe au den da bedi , en he boaniou , var an douar , a zo darn eus he relegou , en ilis miraculus ze , ken caret gant ar roue Gralon ; gouelet a rer , eno , ouspen relegou ar Verc'hes . santes Anna , s. Joseph , an Ebestel , etc. , relegou s. Augustin , s. Ambroas , s. Jerom , s. Ian Chrysostôm , s. Bernard , s. Laurans , s. Sebastien , s. Roc , s. Dominic , s. Caourintin , s. Pôl a Leon , s. Guenole , s. Euzen , etc. , relegou santes Barba , santes Mac'harit , santes Catel , santes Mari-Madalen , santes Philomen , hac eun niver bras a re all , *ouspen daouzec cant* , pere a zo , eno , evel eur hobl a sænt , dirac an Itron Varia Remengol oc'h he fedi da scuilla he graçou var ar belerinet a deu , eus ar pevar avel , da veuli , en ilis sac'r Remengol , Rouanes ar Sænt hac an *Ælès* , alyocadès an anaon , patronès an dud paour , esperanç an oll gristenien , ha mam ger ar Vretonet .

Ha brema , va breudeur d'emp oll ,  
Demp da bardon bras Remengol ,  
Demp da ilis ar Vretonet ,  
Demp da sourcen an oll Remed !...

Dar pardon bras , pelhini a bad pemp devez , an henchou a ve goloet a belerinet , darn bet clân gant clevejou danjerus , darn all , distro divar ar môr , pe eus ar brezel , pere a c'ha diarc'hen hac e corf ho rochedou goadec , oll en em strinkont dan daoulin ractal ma velont tour an ilis santel , alies , en em gav , ive , en ho zouès , eur c'hloarec yaouank bennac , deut evit e guenta goueac'h , hac en eur vouela , gant laouennediguez , e lavar :

- « Salud , douar burzudus var bini bep kamad ,
- » A laka daëlou a joa da zont em daoulagad ,
- » Salud , ilis Remengol , ar gaëra zo er bed ,
- » Salud , va fatrones vad , mam ger ar Vretonet !....

En he guever , ive , eur barz , eur pelerin coz , bet alies e pardonïou Remengol , ha deut c'hoas eur veach , var boues he vaz da c'houlen eur naro mad , a zistro , laouen d'ar gær , en eur gana meuleudi he batronez , chilaouet e het he beden , hac an Itron Varia Remengol e deus assuret silvidiguez d'he ene , e barados Doue , ha repos d'he eskern , betec deis ar varn , e douar biniguet bered he Barres. — Gouskoude pellaat a ra , gant anken .

Harpa a ra alies , var he vaz , ha teleur a ra c'hoas eur zel a drugare varzu ilis he Vam garantezus , pa ne vel mui nemet bec an tour , e koue dan daoulin , hac e lavar , an daëlou , en he zaoulagat .

- » Kenavo'ta , Remengol , kenavo da viken ,
- » Kenavo , Guerc'hes Vari , c'hui pini a garen ,
- » Kenavo , pelerinet , kenavo , tud va bro ,
- » Kenavo er Barados , kenavo , kenavo !!!...

## INDULJANÇOU REMENGOL.

Dre eur scrit apostolic, roet e Rôm, en ilis Sant Pêr, d'ar bemzec a vis even 1853, hon tad santel ar Pap, Pii naø, en deus accordet, en e vadelès, un induljanç plenier ha remission eus ho oll fec'hejou d'ar gristenien, pere, goude beza coveseet ha communit, a visito, gant devotion, ilis sacr' an Itron Varia Remengol; un induljanç a seiz vloas ha ken aliès a zaou-uguent devez d'an oll belerinet, ken aliès goeach m'a visitint, gant devotion, ilis Remengol, ha ma pedint, eno, Doue hac an Itron Varia Remed-Oll.

An induljançou ma a all beza gòunezet evit an anaou.

Dre eur scrit all, roet ive e Rôm, en ilis Sant Pêr, d'an dec a vis guener 1856, (scrit, pini a zo brema exposet en ilis Remengol, var un daulen aotr, e c'hars treid ar Verc'hes) hon tad santel ar Pap en deus c'hoas roet da ilis an Itron Varia Remengol, an oll graçou, induljançou ha privaichou accordet gant ar Pabet da ilis an Itron-Varia-Loretta, en Itali. En ilis ze e conserver an ty e pini e chome ar Verc'hes Vari, e Nazareth hac e pini eo bet concevet hac en deus bevet hor Salver J.-C.

Er bloavès 1295, an Æles a zougas, a dreus an oabl, an ty santel eus a Nazareth, d'an andret, hanvet, hirio, Loretta, tœst da Rôm, savet zo bet eno, un ilis caër, pini zo bet abaoue darempredet bras ha carguet a c'hraçou gant ar Pabet.

N'eus er bed universel nemet an ilis ze, ilis Loretta, hac ilis an Itron Varia Remengol, da bere e ve bet roet graçou ker bras, ker caër. Ar gristenien a visito brema hac en amzer da zont, ilis Remengol, ker brudet dre e miracloù, a c'houïezo ar memeus induljançou hac ar memeus graçou, evel ar re a ïa da Jerusalem, da Rôm pe da ilis Loretta, da visita bez hor salver J.-C. bejou an ebestel ha ty ar Verc'hes Vari.

Madou spirituel ken precius a zo un testeni eus a zevotion hon tad santel ar Pap en andret an Itron Varia Remengol hac eur merk eus e garante evit ar Vretonet, pere a gavo bepret en ilis sacr' Remengol, remed en o foanio, var an douar, pardon d'ho fec'hejou, silvidiguez d'ho Ene ha delivranç d'an anaou.

---

## MEDALEN AN ITRON VARIA REMED-OLL.

Medalen an Itron Varia Remed-oll, *biniquet hac induljanciet* en ilis sacr' Remengol, dre urs hon Tad Santel ar Pab, a ro d'an den, fizianz e Doue, nerz a enep an drouc speret, chanç ha boneur, var ar môr, er brezel, en trubuïllou ar bed, consolation ha remed en oll boaniou hon deus var an douar. Peb c'hristen a gle, e pad e vue, douguen gant respet, en he guerc'hen, medalen precius an Itron Varia Remed-oll, hac en eur vervel, hen lakat var he galon evit mont dirac Doue.